

# AR VUHEZ KRISTEN



XL

Dimezi ar Werc'hez Vari.

COUVENT DES CAPUCINS — ROSCOFF

## LENNIT PIZ

## KEMENT-MAN

Priz ar gelaouenn :

“Ar Vuhez Kristen” hepken :

Koumanant ordinal : 10 lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :  
15 lur

Ar Vuhez Kristen ha Kenteliou St Fransez

Koumanant ordinal : 13 lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :  
16 lur,

Kenteliou Sant Fransez hepken :

3 lur (eur skoed)

SKRIVA DA :

Monsieur le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »

Couvent des Capucins

C. C. 209-81 Nantes

ROSCOFF (Finistère)

## Taolenn ar miz

Jezuz e liorz an Olived.....	p. 23
Chomit er gêr.....	p. 26
Ar gofesion war loan.....	p. 27
Jezuz-Krist hag e relijion.....	p. 29
Penaos oun deuet da veza tenner-dent.....	p. 32
Hitler... piou eo ?.....	p. 35
Evel ma labourer an douar.....	p. 37

13<sup>o</sup> bloavez

MIZ C'HOUEVRER 1939

N° 2



Ra vezo meulet Jezuz-Krist !.. Bepred

## Kenteliou Sant Fransez

— KELAOUENN AN DREDE-URZ —  
Priz evit eur bloaz : eur skoed (3 frs)

An holl liziri a dle beza kaset da : R. P. Eugène Le Quéau,  
Couvent des Capucins, Roscoff, (Finistère). — C/C. 291-62 Nantes.

Va Breudeur ha va C'hoarezed ker.

Celano, ar c'henta a skrivas buhez sant Fransez, a lavar d'eomp : « Fransez a seblante beza nann eun den o pedi met ar bedenn en em c'hraet den. » Na c'houek e oa e bedenn en nosvez a dremenas e ti Bernard a Gentaval ! pegen tomm ne oa ket e galon pa welas Jezuz hag e Vamm santel o tigas d'ezan Induljans vras ar Porsionkul ! Piou a lavaro ar garantez a verve ennan pa bede en « ilizou paour ha dilezet ! »

Eur vuhez a bedenn ha netra ken e voe e vuhez a-bez. Ken aes e pede ha ma tenn ar re all o alan. « O vont pe o tont, o tibri pe oc'h eva, en e gambr pe er maez, o labourat pe o tiskuiza, dre holl ha bepred e pede. Lavaret e vefe bet e pede n'eo ket hepken gant e spered hag e gorf, met ivez gant e oberou hag e amzer.

\*\*\*

Va Breudeur ha va C'hoarezed en T. U., setu ho skouer. Evel hon Tad, karit pedi, bezit eneo a bedenn.

Bemdez ar Reolenn a verk d'eoc'h eun nebeut pedennou da lavarout : c'houi hoc'h unan a gav re all c'hoaz a dra sur. Met arabat o lavarout dre voazamant. Grit anezo atao c'houek, kalonek. Gwelloc'h eo eun nebeut pedennou, gant ma vezint birvidik, eget kalz pedennou lavaret hep evez.

Diouallit dreist-holl d'ober pedennou ha ne vezont nemet war ar muzellou. Sevel a rank ar bedenn diouz eur galon karget gant doujañs ha karantez Doue. Roit d'ar bedenn ar plas a zo dleet d'ezi : ar c'henta.

\*  
\*\*

Evel hon Tad sant Fransez, hervez gourc'hemenn H. S., « pedit bepred ». Gwir eo : ne c'hellit ket beza atao o tibuna pateriou, eus ar mintin betek an noz, met bezit eneoù a bedenn, da lavarout eo :

Bevit dirak Doue e pep amzer : an Ao. Doue a zo atao en ho kichenn, pe kentoc'h, en ho kalon, hervez komz H. S. : « Me a zo ennoc'h ha c'houi a zo ennoun. »

Bep mintin kinnigit da Zoue ho kalon, ho labour, ho puhez, ar boan hag al levenez a vezo ho lodenn a-hed an deiz.

En em voazit da sevel ho spered war-du an Neñv dre eur bedenn verr met birvidik.

Santelaet e vo evelse ho puhez, talvoudusoc'h hoc'h oberou, tostoc'h da Zoue ho kalon. « Neb a bed nebeut, hennez ne vo sant biken. »



## Respontchou . . .

Darn eus Renezed ar Breuriezou o deus respontet d'ar goulennou a raemp outo, er miz tremenet. Trugarez ha bennoz Doue d'ezo.

War peseurt poënt e c'houlennont diganeomp poueza e K. S. F. ?

Kalz anezo a zo glac'haret dre na vezer ket fidel awalc'h da zont d'ar Vodadeg bep miz; lod all a lavar e tisonj c'hoarezed an D. U. e c'houlenn ar Reolenn outo mont d'an oferenn, zoken war ar sizun, ken alies gwech ma c'hellont ha rei skouer vat endro d'ezo o tostaat alies ouz ar Sakramanchou; evit re all ne vez ket dalc'het awalc'h war an teod hag an dra-se a bella diouz an D. U. tud a volonteze vat prest da zont enni.

War gement-se holl n'hellomp ket poueza hirio. Koulskoude, taolit evez ouz kement-man.

Evit gellout beva ha kreski, eur genvreuriez, n'eus forz pe hini e ve, a rank boda, eur wech an amzer, he izili. Asamblez e kavont nerz ha sikour, n'eo ket hepken evit heulia ar reolenn, met ivez evit he lakaat da skedi endro d'ezo.

Unan eus poëntchou talvoudusa er Reolenn eo bodadeg ar miz. Ma vez graet hag heuliet mat ar vodadeg, e vo buhez er Vreuriez, ha ne vo ket diaes lakaat an eneoù a volonteze vat da rei d'ezi o hano.

Kement hini a zo er Vreuriez eo e zeveler dont d'ar vodadeg. N'heller chom hep mont nemet pa vez eun abeg bras bennak : ha neuze, evit ma vo urz e pep tra, eo ret hel lavarout araok d'ar Rener pe d'ar Renereze.

Eun abeg bras ne gaver ket alies : digareziou avat, ne lavaran ket. Daoust ha n'heller ket en em ziaeza eun tam-mik e Trede Urz ar Binijenn ?

---

## Eun taol-lagad war va buhez : Diwarbenn pec'hejou an teod

1° — Daoulina a ran alies er gador-gofez, evel ma c'houlenn va Reolenn. — Daoust hag an hanter eus va fec'hejou n'int ket pec'hejou graet gant va zeod : ober goap, lavarout gevier, drouk-komz, tamall e gaou, en em veuli...

2° — Evit diarbenn an drouk eo ret gouzout e pe lec'h eman. — Ha klasket em eus petra a zo penn-abeg d'ar pec'hejou a ran dre va zeod : gwarizi, c'hoant beza gwelet, meulet, aon da lavarout ar wirionez, kasoni ?..

3° — Ar justiz a c'houlenn ma vezo roet da bep hini ar pezh a zo dleet d'ezan. — Ha sonjet em eus pegen diaes eo renta d'an nesa an istim, ar brud vat en deus kollet dre va zeod fall ?

4° — « En em virout a raint gant evez diouz ar c'homzou dizonest, ar c'hoaperez hag ar farserez divalo ». — Ha fidel oun da deurel eur sell war va c'houshianz evit gwelout ar faziou am eus graet, war ar poënt-se, a-hed an deiz ? Daoust ha n'em eus ket roet skouer fall, endro d'in, gant va c'homzou ?

5° — Awechou e klever : « Merc'hed an D. U. o deus teodou fall. » — Ha direbech oun war ar poent-se ? — Daoust ha n'oun ket douget da glask klevet, da selaou, da vruda traou faoz ?

6° — Daoust ha mestr oun d'am zeod ? Daoust ha neket va zeod eo a zo mestr d'in ?

Dalc'homp sonj eus lavar hon tud koz : « Ma talv va c'homz eur pezh-arc'hant, chom sioul a dalv ouspenn eur c'hant. »

## Reolenn Garcia Moreno

Garcia Moreno, eus T. U. sant Fransez, Presidant Republik an Equateur, a voe eur c'hristen eus an dibab. En e leor : Imitasion J. K. a zouge bepred warnan, eo bet kavet ar Reolenn-man, skrivet gantan e-unan. Ma teufe kement hini a zo e-penn ar broiou, ma teufe an holl gristenien da veva eveltan, na buan e vefe chanchet stad ar bed.

« Bemdez e klevin an oferenn, e lavarin va chapeled hag e lennin eur pennad eus Imitasion J. K. hag ar reolenn-man. »

« Klask a rin en em zerc'hel, ar muia ma c'hellin, dirak Doue, dreist-holl pa vezin o komz gant an dud, Alies e kinnigin va c'halon da Zoue, dreist-holl araok boulc'ha eul labour bennak. »

« Pa vezin touellet e lavarin : Petra a sonjin eus an dra se d'am eur ziweza ? »

« Pa c'hellin mont war va daoulin ne bedin ket azezet. Ne gomzin ket ac'hanoun nemet evit anzav va zechou fall ha va mankou. »

« Poania a rin, dre eur sell ouz Jezuz hag e Vamm, da gaout pasianted, da veza hegarat ouz an holl, zoken pa vezin tregaset; ne zroukprezegin morse eus va enebourien. »

« Ne rin nemet labouriou talvoudus hag e kasin anezo da benn. Ne glaskin e pep tra nemet gloar an Ao. Doue. »

« Diou wech e taolin eur sell war va c'houstianz diwar-benn an holl draou am bo graet a-hed an deiz. »

« Koves a rin bep sizun. »

« War evez e vezin o tiskouez d'an dud va c'harantez. »

### GOUELIOU HAG INDULJANSOU AR MIZ

Deiz	GOUELIOU	Indul.
1 M	S. Ignas, Esk. M. ....	I. P.
2 J	Gouel Jezuz kinniget en Templ. ....	A.G.I.P.
4 S	S. Joseph a Leonis kap. ....	I. P.
5 D	Septuajesim ....	I. P.
14 M	An dud eürus Andre, Rizier, Anton 1 <sup>o</sup> O. ....	I. P.
19 D	Quinquajesim ....	I. P.
22 M	Merc'her al ludu ....	I. P.
25 S	Plac'h eürus Isabel 2 <sup>o</sup> O. ....	I. P.

Da zeiz ar Vodadeg I. P.

HON ANAON : Lannedern : Françoise Berthéléme (69 bloaz). — Plouneour-Ménez : Marie Yvonne Mer (noviz). — Melgven : Marie-Anne Le Bihan (79 bloaz). — Roudouallec : Joseph Daouphars (41 bloaz). — Lannilis : an Itron Merrien.

Imp. LE BAYON-ROGER & C<sup>ie</sup> - Lorient.

Le Gérant : G. Le Bayon.

## Jezuz e liorz an Olived

E bedenn hag e angoni. — An trubard Judaz e laka etre daouarn e enebourien.

Echu e zivizou hag e bedenn, Jezuz a guitaas ar Senakl hag a dreuzas gant e ziskibien froud ar Sedron evit mont etrezek menez an olived a zo er sav-heol a Jeruzalem. Ehars ar menez-se e oa eul liorz hanvet Jetsemani ha mont a rae alies da bedi ennan gant e ziskibien, pa yae da Jeruzalem evit ar gouelioù : rak-se e oa anavezet mat al lec'h-se gant Judaz, an hini a dlee e werza.



Ra  
vezo  
graet  
ho  
polontez !

En eur erruout eno, Jezuz a lavar d'e ebestel : « Azezit amañ epad ma 'z in me pelloc'h da bedi; pedit c'houi ivez evit na gouezet ket en dentasion. » Neuze e kemer gantan tri anezo : Per, Jakez ha Yann, hag ez a ganto el liorz. Hag, en eun taol, e krog en e galon aon hag enkreze hag en em gav gwasket gant ar vrasa tristidigez. « Va ene, emezan d'ezo, a zo ken trist ma vennan mervel; chomit amañ ha beilhit ganen. »

Goude beza lavaret d'ezo ar gomz-se hag aet eun tammig pelloc'h, keit ma hell mont eur maen sllapet gant an dorn, e kouezas d'an daoulin war an douar d'ober ar bedenn-man : « Va zad, mar plij ganeoc'h — c'houi hell pep tra — pellait diouzin ar c'halir-mañ. Koulskoude, ho polontez bezet graet, ha n'eo ket va hini ! »

Skler eo d'eomp, o klevout Jezuz o pedi evelse, e oa gwasket e galon gant ar vrasa poan : pasion e ene a oa neuze da c'hortoz pasion e gorf. Hor Salver, dre ma oa den evelomp, a helle kaout, evelomp, aon hag enkreze, tristidigez ha glac'har. Gwelout a rae o tostaat ar poaniou a dle gouzanv — o anaout a rae holl dre ma oa Doue, hag evelomp heuz en doa outo ha krena'rae dirazo ha dirak ar maro. Ouspenn, Jezuz en em wele sammet a holl bec'hejou an dud, dre ma oa falvezet gantan o c'hemer warnañ evit o lemel diwarno, o paea evito da justiz e Dad; hag an dra-se a rae doñjer d'ezan, doñjer ouz loustoni hor pec'hejou, dreist-holl ar pec'hejou mezus. E ene a oa c'hoaz en dristidigez o sonjal n'en dije ket eleiz a dud, abalamour d'o fallentez, lakaet da dalvezout e wad skuilhet

evito hag e vijent, dre o faot, daonet da viken !

Setu perak e oa glac'haret kalon hor Salver. Met ne fallgalone ket, eveldomp-ni re alies, dirak ar boan, hag o c'houzout mat e oa bolontez e Dad e c'houzanvje poan hag e varje evit savetei an dud, hen a lavare d'ezan : Ra vezo graet ho polontez-c'houi, ha n'eo ket va hini-me ! Evelse e tlefemp, ni ivez, lavarout be wech ma laka an Aotrou Doue eur groaz bennak war hon diousoaz, eur boan en hor c'halon.

Diou wech Jezuz a sav evit mont da gaout e ebestel. O c'haout a ra kousket, « Simon, emezan da Ber, kousket out ? » Ha d'ezan ha d'an daou all e lavar : « N'hoc'h eus ket gellet chom dihun, eun eur, ganin ?... Beilhit ha pedit, rak mar deo prim ar spered, ar c'horf a zo sempl. »

Diou wech ivez ez a endro d'al lec'h ma oa o pedi hag e lavar atao ar memes peñenn : « Va Zad, pellait diouzin ar c'halir-man ! Koulskoude, mar n'hell ket tremen hep beza evet ganin, ra vezo graet ho polontez ! »

Startoc'h-starta e pede, ha dre ma pede e plege gwelloc'h-gwella e volontez da volontez e Dad. A-benn ar fin e kouezas evel en angoni. Hag e gorf astennet war an douar a oa goloet gant eur c'houezenn a wad hag a zivere. Neuze eun El a zeuas eus an Nenv, a berz e Dad, evit e frealzi.

Eun drede gwech, ez eas hor Salver daved e ebestel : « Kouskit breman, e lavaras d'ezo an taol-se, ha diskuizit ! Setu deut an eur ma vezo laket Mab an den etre daouarn ar bec'herien... Savit, deomp, tostât a ra an hini a dle va gwerza. »

E gwirionez, epad ma komze evelse, setu m'en em gav Judaz Iskariot, unan eus an daouzek abostol, hag en doa e werz etre dija d'e enebourien. War e lerc'h e oa eur vandenn dud : soudarded, hag ivez mevelien digaset gant prinsed ar veleien, ar skribed hag ar Farizianed, leterniou ganto ha goulou, klezeier ha bizier.

An trubard en doa roet d'ezo ar merk-man : an hini a bokin d'ezan, hennez eo; krogit ennañ ha kasit anezañ ganeoc'h. Tostaat a ra ouz Jezuz hag e pok d'ezañ en eur lavarout : « Salud, Mestr ! » Elec'h e c'hourdrouz gant ruster, Jezuz a respont gant douster en eur henvel anezan c'hoaz e vignon; evit teneraat e galon hag e savetei e tiskouez d'ezan grevusted e dorfed : « Va mignon, petra out-te deut d'ober ? Judaz, gant eur pok e werzes Mab an den ? »

Goude ez a war eeun d'an dud a oa a-drenv an trubard. « Piou a glaskit ? » — « Jezuz a Nazared » — « Me eo ». Hag en eun taol, evel pa vefent bet skoet gant ar gurun e kouezjont d'an douar. Dre-se e tiskoueze Jezuz skler en dije gellet en em denna a dre daouarn e enebourien hag ez ae, a volontez vat, d'ar maro.

Pa voent savet en-dro, Jezuz a c'houlenñ c'hoaz diganto : « Piou a glaskit ? » — « Jezuz a Nazared. » — « Hel lavaret am eus d'eoec'h, me eo. Rak-se mar d'eo me a glaskit, lezit ar re-mañ da vont kuit. » Ha gant e zorn e tiskoueze e ziskibien.

Ar re-man koulskoude, o welout penaos e troe an traou a c'houlen : « Mestr, ha ne skofemp ket gant ar c'hleze ? » Hag hep gortoz ar respont, Per a denn e gleze, a sko war unan eus mevelien ar beleg bras, hanvet Malkus, hag a droc'h d'ezan e skouarn dehou. Raktal Jezuz a ra d'an den-se tostât hag a bare d'ezan e skouarn. Hag e lavar da Ber : « Laka da gleze en e c'houhin, rak an neb a

sko gant ar c'hleze a varvo dre ar c'hleze. Ha te gred n'hellan ket pedi va Zad, hag e tigasfe d'in daouzek arme Elez evit va difenn ? Penaos neuze e teufe da wir ar skritur hag a lavar e tle an traou digouezout evelse ? »

Eun  
ael  
a  
ziskan  
eus  
an  
Nenv.



Hag en eur zistrei wardu ar vandenn dud a oa dirazañ, beleien ha servicherien an Templ en o zouez, e lavar d'ezo : « Deut oc'h amañ gant klezeier ha pennou-baz da gregi ennoun, evel ma rafec'h evit eul laer. Bemdez koulskoude e vezen en ho touez, o prezeg en Templ ha n'ho peus ket kredet lakat ho torn warnoun. Met deut eo breman hoc'h amzer-c'houi ha galloud an ifern; ret eo e teufe da wir ar pez en deus lavaret ar brofeted. »

Neuze ar soudarded hag ar re a oa deut aberz ar Juzevien a grog e Jezuz evit liamma e zaouarn d'ezañ. Kerkent, e ziskibien a zilez anezañ hag a dec'h kuit.

Mar d'omp awechou dilezet gant hor c'herent pe hor mignoned, sonjomp en hor Salver dilezet gant ar re a gare ar muia war an douar, warlerc'h ar Werc'hez Vari, e Vamm.

### Eur c'hlenved nevez

Abaoue disul, va mignon Fanch a zo war e wele... eur boan-gof spontus d'ezañ.

Bet eo bet ar medesin ouz e gaout... « Ce n'est pas bien grave, eme ar medesin, cela passera... c'est un embarras gastrique ».

— Ha me ivez a zo aet betek ti va c'hamalad koz...

— Ha neuze, Fanch, penaos emañ ar vuhez ganez ? Petra 'n deus lavaret ar medesin d'it ?

— Lavaret en deus n'eo ket kalz a dra... eun tamm-bara gastrique eo, emezañ.

GWIRBATER.

## CHOMIT ER GER

Bez' ez oa, galvet « Black »  
Eur c'hi doñv, eur c'hi vak.  
Blevet hir ha du-pod.  
A c'hano  
An ano.

Moumounet dreist gant lod,  
Gant an holl kañjolet, evurus e veve  
En e log, er goudor. Hervez c'hoant, en deve  
Boued mat ha frankiz. Ez-wir, daoust ma'z eo kloz,  
Ec'honder a ginnig d'ar chas ar maner koz.  
Eul leurenn, liorzou leuniet a wez-frouez,  
Baliou goudoret; gwez estren, gwez rouez.  
Peadra da blijout da dud, d'arvealed  
En deus Doue hep mar, er maner, ingalet.  
E-unan ar c'hi-du hen anzave moarvat,  
Rak morse ne glemmas, dirak den, gant e stad.  
Met, allas ! eun devez, dirak ar porrastell  
E voe gwelet o klask dilezel ar c'hastell.  
— An douar, emezan, a zo brasoc'h eta  
Ha kalz kaeroc'h eget ra sonjen da genta. »  
Gantan e falvezas gwelout, klevout, tañva;  
Dreist ar c'hleuziou lammal evel ar chas skañva.  
Er porrastell diglos, dre guz, sioul, lostek  
Ez eo heñ tremenet. Bremañ e kerz postek  
Sounn e benn hag e lost. Disonjet ar maner !  
Na plijus an hent-bras warnezañ pa straner !

Gwall-ur war ar c'hastell ! Eur stok yud ken ha strak !  
Eun dumporell-dre-dan en deus... lazet hor « Black »

\*\*\*

Na ped  
Er bed  
A lazaz dre frankiz  
Kened o yaouankiz.  
Plac'hig koart,  
Daoust d'az c'hoant,  
Gwella' ri  
Chom en ti.

BROGAROUR.

## Ar gofesion war loan



Ar jeneral Deleure  
a gontas gwechall, d'e  
vignoun Henry Au-  
renche, an istor sebe-  
zus-man.

Er bloavez 1886 oa,  
epad brezel an Ton-  
kin, Deleure, neuze

kabiten, a voe karget da ober, war an eur, eur gefridi a bouez. A-gevret gant an Tad Lalande, lazaret, e rankas treuzi eur c'hoad bras, e-kreiz an noz. Ha setu petra zigouezas. Selaouomp anezan :

« E-kreiz an noz sioul ha tenval-sac'h, setu ma klevomp en eun taol, yudadenn an tigr.

Sellet a rajomp an eil ouz egile... an Tad ha me, hag an hevelep komz, a darzas war hor muzellou : an tigr, an debrer tud.

Hor c'hezeg spountet, en em winte, prest da lammal treuz-didreuz er brouskoad. Met graet voe d'ezo bale eüin, dre vrouda d'ezo o c'hosteziou.

Hir e oa c'hoaz an hent, eul leo hanter da nebuta. A vare da vare e teue yudadenn an tigr d'hol lakaat da skrija.

Tostaat a rae ouzomp al loan gouez. Gwenv ha nerzus, evel ma 'z eo e c'houneze buan warnomp, oc'h en em sila dre douez ar skourrou. Eur c'houezenn yen a rede war hon tal... En desped d'in, e skrijen bep tro ma yude, tostoc'h tosta d'eomp, an tigr debrer-tud. Ret eo beza klevet ar vouez-se, klemmus da genta evel eur viaouadenn hag a darz da c'houde evel ar gurun. Boudinellat a rae va fenn evel pa vije o vont da faouta. Emaoun bruzunet etre skilfou al loan-gouez, a sonjen ouzin va-unan...

Hel lavaret a c'hellan, breman pa 'z oun eur soudard koz... Epad ar brezel, em eus gwelet, aliez awalc'h, ar maro a-dost. N'em eus bet morse aon razan... Met amañ, tenvalijenn ar c'hoad bras, ar sonj e oa al loan gouez-se o taoulammal war va lerc'h a oa evidoun eur verzerenti. N'oan ket evit padout pelloc'h... Ken buan all, em bije lenvet evel eur bugel.

War ledannaat e yae bremañ an hent... Dre boulza eun tammig war e varc'h ar misioner, en eul lamm, a zeuas skoaz ha skoaz ganen.

Sellet a ris outan hag e voen souezet o welet ar peoc'h o para war e zremm... Elec'h c'hoarzin d'in, krener ma'z oan e selle ouzin gant dousder ha karantez. Epad ma oan, me, evel kollet va fenn gannen, ar misioner en doa digoret e

galon da Zoue, ha Doue en doa lammet anezi pep spount ha pep enkrez.

An Tad a lakaas e zourn war va skoaz :

— Va mab, kovesañt; ho selaou a ran...

Pell bras a ioa, a-dra-zur, n'oa ket bet o kovez. Abaoue m'oañ deut eus skol « Saint-Cyr », moarvat...

Bloaveziou ha bloaveziou a oa tremenet abaoe... Ne jomis ket da varc'hata. Eur beac'h pounner a nijas diwar va c'houstianz. Ne gleven mui zoken daoulamm-ruz hor c'hezeg... na yudadennou an tigr o lake d'en em winta... Ar bedenn a darzas hec'h-unan war va muzellou, evel ma tarz an dour diouz eun eienenn grenv.



— Ho pennoz d'in, va Zad, abalamour ma 'm eus pec'het.

Ha pa glevis ar c'homzou frealzus : *Ego te absolvo*, eur peoc'h dudius, evel an hini am oa gwellet war zremm ar beleg a ziskennas em ene. Skanv e oa bremañ va c'halon. Ne ouien mui zoken edo an tigr war va roudou.

Hag e gwirionez ne glevet mui ar yudadennou skiltrus... Daoust ha kouezet e oa al loan gouez en eun toull-trap bennak ?... Ar peñz a oa sur ne veze klevet trouz ebet ken... Met petra oa bet penn-abeg d'ar mirakl-se ?

Her gwelet a rejomp raktal. Eur strollad tud eus ar vro, renet gant eur sarjant, a zirede gant tiz, goulou ganto. Al letanant o welet n'en em gaven ket da serr-noz, en doa degaset eun « eskouadenn » d'am diambroug.

Hag an tigr, heñvel war ar poent-se ouz an holl loened gouez, a dec'has pa welas sklerijenn al leterniou...

Saveteet e oamp an Tad ha me.

JB.

## Divinadenn ...

— *Pehini eo ar miz a vez ennañ an nebeuta marvailhour gant ar merc'hed ?*

— *Miz c'houevreur, rak berroc'h eo eget ar miziou all.*

## JEZUZ-KRIST HAG E RELIJION

### *Kenta lodenn : PIOUS EO JEZUZ-KRIST ?*

Jezuz, emezan, a zo deuet evit renta gloar da Zoue ha savetei an eneou. Evit ar gefridi-se, e lez pep tra all a-gostez, ec'h en em zilez e-unan.

Ne glask ket meuleidiou an dud.

Pa ra burzudou, e tifenn peurliesha komz anezo. E Kafarnaum, eun dervez, en doa pareet e-leiz a dud klanv. Antronoz-mintin, Jezuz a zo er-maez eus kêr, en eul lec'h distro. E Ebestel a zeu d'e gaout, hag a lavar d'ezan : « *An holl a zo o klask ac'hanoc'h.* » Jezuz a respont : « *Deomp d'ar c'hêriadennou a zo du-se, ma prezegin enno ivez. Deuet oun evit an dra-se.* »

Goude burzud ar bara kresket, e fell d'ar bobl hel lakaat da roue. Jezuz a ra d'e ziskibien pignat buan en eur vag, ha treuzi lenn Jenezared, hag e ya e-unan da guzat war eur menez. Ne entent ket beza distroet diouz al labour fiziet ennan. N'eo ket e c'hloar eo a glask. « *Eun all a gemer soursi anezi* », gloar Doue eo ha silvidigez an eneou.

Nag o c'harantez.

Karout a rae, a-dra sur, e di bihan, e Nazared, en doa tremenet ennan 30 vloaz o labourat e peoc'h; karout a rae gant ar brasa teneridigez ar Werc'hez Vari, e Vamm, ha karet e oa ganti, evel ma n'eo bet karet den war an douar. Kuitaat a ra koulskoude Nazared, dilezel a ra e Vamm beniget evit en em rei holl da servij an eneou. « *Va c'herent tosta, emezan, eo ar re a selaou komzou Doue.* »

Evit kelenn an dud, e vevo epad tri bloaz evel eur rederbro, n'en deus na ti nag aoz; kentoc'h, evel ma lavaro e-unan, evel eur Pastor mat, atao war an henchou, war-lerc'h an danvad dianket : « *Lapoused an Nenv o deus eun neiz d'o goudori, al lern o deus o douarenn, Mab an den n'en deus ket eur maen da harpa e benn.* »

Ha nebutoc'h c'hoaz danvez.

Jezuz n'en deus yalc'h ebet; an aluzenou a reer d'ezan a sikour an Ebestel da veva. Ar peñz a chom eus o dilerc'h a vez rôet d'ar paour. Den morse ne damallo d'ezan beza graet an distera stad eus an arc'hant.

E vadelez.

An holl avat a rank meuli ennañ eur vadelez dispar. « *Tremezet en deus e vuhez oc'h ober vad* », a lavare anezan unan eus e Ziskibien. Hag, evit gwir, n'eus ket eur bajenn en Aviel, na gavfemp enni eur merk bennak eus e vadelez. D'ezañ e-unan n'en deus damant ebet. Noz-deiz, emañ e servij an holl, met gant ar re-all, gant e Ebestel dreist-holl, nag a breder ! Pa 'z eo distro e Ebestel, en doa kaset da brezeg, e lavar d'ezo gant dousder : « *Deuit a-gostez, ha diskuizit eur pennadig*. » Rak kement a dud a yae hag a zeu en-dro d'ezo, ma n'o doa ket amzer zoken da zibri. Pignat a reont eta en eur vag evit mont da Vetsaïda, en tu all d'al lenn. Met gwelet o deus an dud da belec'h e tizont. D'ar red e reont an dro d'al lenn, hag e tigouezont eno en o raok. Jezuz, o tiskenn eus ar vag, a wel dirazan eur bern tud. Truez en deus outo, hag en em laka d'o c'helell.

Nann, n'eo ket henvel ouz ar skribed hag ar Farizianed n'o doa nemet disprizans evit ar bobl, an dud paour ha dizesk.

E drugarez.

N'eo ket evit gwelout eun den er boan, hep hen dizamma raktal. En eur vont da gêr Naïm, ec'h erru gant eur c'horf maro, korf eun den yaouank, mab eun intanvez ha n'he doa ken krouadur nemetañ. Jezuz, o welout glac'har ar vamm gaez, a zo teneraet e galon, hag a lavar d'ezi : « *Na ouelit ket*. » Digas a reer d'ezan klanvourien a bep tu ha da bep eur eus an deiz; atao e tegemer anezo gant madelez. E Jeriko, eun dervez, eun den dall a youc'h outan a bouez-penn : « *Jezuz, Mab David, bezit truez ouzin*. » Bouzaret gant e youac'hadennou, an Ebestel hag ar re-all a glask ober d'ezañ tevel; met Jezuz a gemer truez outan, ha chom a ra da renta d'ezañ ar yec'hed.

Eur wech all, tud lor eo a c'houlenn digantañ ar pare, a-ziabell. Jezuz, petra bennak ma c'helle o farea gant eur ger hepken, a ya betek enno, a douch outo gant dousder, hep aon rak o c'hlenved.

Trugarezus eo.

e kenver an holl, zoken ar vrasa pec'herien.

Skribed ha Farizianed a zigas dirazan, eun dervez, eur wreg avoultreuz. « *Lezenn Moyzez, emezo, a ra urz d'he labeza, ha c'houi, petra'livirit da ober ?* » Jezuz, o taoublega, a skriv gant e viz war an douar, hag evel ma kendalc'hont

d'ober goulennou outan : « *An neb ac'hanoc'h a zo didamall, ra stlapo outi ar maen kenta*. » O klevout ar c'homzou-man, ez eont kuit an eil goude egile. Jezuz a sav neuze : « *Maouez, emezan, e pe lec'h emañ ar re ho tamall ? N'o deus ket ho kondaonet ?* — Nann, Aotrou. — *Me, kennebeut, n'ho kondaonin ket. Kit hag hiviziken na bec'hit mui*. »

Zoken an dud dianaoudeg.

Rak nebeud a ziskouez d'ezan anaoudegez vat. War zek den lor pareet gantan, er memes dervez, unan hepken a zeu en dro d'hen trugarekaat. N'eus forz, kenderc'hel a ray gant e vadoberou.

E vignoned.

Daouzek Abostol en deus dibabet, tud dister, hep deskadurez, dientent, d'ezo pep seurt siou fall. Ober a ra anezo koulskoude, n'eo ket e servijerien, (an dra-man hepken a vije bet eun enor bras evito), met e vignoned. Gant pebez pasianted e kelenn anezo, e c'houzanv o zechou ! Gant pebez dousder e c'hourdrouz anezo, pa rank hen ober ! Gant pebez trugarez e bardon anezo, goude m'o deus graet ken divalo d'ezan epad e Basion ! E gwirionez, eur vamm n'eo ket gwelloc'h evit he bugale. REP.



## HA GALLEG SAOUT ADARRE

En « auto » etre Plabennec ha Lesneven.

— *Tiens, Finik, tu es là toi aussi, d'ousque tu viens.. de Brest ?*

— *Voui... trouver le dentisse que je suis été.*

— *Han, voui... je vois, voui, que ton bouche il est « koenvé »... tu as eu beaucoup du mal ?*

— *O, non, vat ! rien du tout que j'ai santet... pisque je suis été « sensibilizet ».*

— *« Sensibilizet » ? Mis à dormir que tu as été ?*

— *Mis à dormir je suis pas été, mez « sensibilizet » que je te dis.*

— *Quoi que c'est ça alors sensibilizet ?*

— *Et bien le dentisse il à piqué dans mon bouche avec un machin là... comme... un nadoz et... j'ai santet plus rien du tout après.*

— *Chic ça hein ?*


GWIRBATER.

## Penaos oun deuet da veza "tenner-dent"

C'hoarvezout a ra alies, gant ar misioner, kaout kudennou da zirouestla... Ha taoler evez mat a rank penaos en em gemerout... An Indianed, pa ouezer diouto, a heller ober ganto n'eus forz petra... met diouallit mat d'o feuka... mouzat a rafent ouzoc'h betek ar varn jeneral.

Tud ar broiou kristen a sonj d'ezo awalc'h eo ar misioner eur Yannik a vil vicher : kalvez, mañsoner, toer, chaseour ha me oar me !

Kement-se n'eo ket gwir en holl vroioù... hag amañ ez eus meur a gorn-bro, n'helfe ket enno ar misioner ober pep micher... disprizet e vefe gant ar bayaned.



Bez ez eus evelato eur vicher a c'hell kemer, hep aon ebet, dre an Indez a-bez, hag ar vicher-se eo hini ar medesin. Ar misioner, ha ne oar ket para ar c'hlenvejou n'eo ket misioner Doue eo, a lavar ar bayaned.

Ar c'hlenvejou, emezo, n'hellont ket beza digaset d'eomp gant Doue, rak Doue a zo leun a vadelez. An diaoul hepken a hell o stlapa warnomp. Met ma 'z eo ar misioner mignon Doue, eo trec'h d'an diaoul ha trec'h ivez d'ar c'hlenvejou a daol an diaoul war an dud. Setu perak, evit payaned ar vro-mañ, eur misioner a zo sur eur medesin mat.

Ma ne deu ket a-benn ouz eur c'hlenved bennak, n'eo ket hen evelato eo a vo tamallet, met an diaoul ha n'eo ket pliget gantan senti. Ma teu avat ar c'hlanvour da gaout ar yec'hed ar misioner hepken eo a vezo kaoz...

Kompren a reot bremañ perak oun deuet da veza, tenner-dent... eur « chirurgien-dentiste » mar plij !

Beza « tenner-dent » a zo eur vicher ha n'eo ket dispignus. Aesoc'h eo a dra-sur rei louzou d'an dud, met kement-mañ a goust ker, ha yalc'h ar misioner peurvuia a vez henvel ouz hini ar gouarnamant ; goulo... ha n'en deus ket ar misioner siouaz, galloud da voula bilheji-bank nevez kement ha ma plij gantan...

Beza « tenner-dent », ouspenn-se, n'eo ket diaes. Poan ho peus en eun dant bennak ? Brein eo ho tant, sklaer eo. Gouzout a ran, ar medesined o deus invantet eur bern traouechou evit kempenn d'eoc'h eun dant brein... met kaer o deus ober, eun dervez bennak

an dant brein a c'hoario adarre e benn. Pa vez tennet, da vihana eo echu gant ar boan evit mat.

Seul vui ma vez bras ar servij a rentit da unan benak, seul vrasoc'h e vez ivez e anaoudegez vat. Eur boan skrijus eo ar boan dent... setu perak e vezo bras anaoudegez ar payan diboaniet gant ar misioner... E galon digoret d'an anaoudegez vat a chomo digor ivez d'an Aviel.

Graet mat e oa eta va sonj. Dont a rajen da veza tenner-dent.

Met n'eo ket awalc'h ober ar sonj, ret eo kregi er vicher...

Eun tenner-dent, eus ar Japon, deuet da chom da gerig Erualkulam, a roas d'in teir durkez nevez-flamm hag a reas d'in eun tamm-skol war an doare tenna-dent... Ne oa ket teo ar pezh am boa



desket gantañ... met dont a reas sonj d'in ouz Yannik, marichal Lopre... Hennez, gwechall a denne dent da holl dud ar c'hanton... ne oa ket bet er skol gant medesin bras ebet, ha koulskoude e oa rouez an dennerien-dent, ken barrek ha Yannik war o micher.

Kement-man a roas kalon d'in...

Kenta hini a zeuas d'am gwelet a voe Tangamma. Eur vaouez koz, dizec'het gant an heol tomm, ha ne oa mui anezi nemet kroc'hen hag eskern. Dont a reas betek ennoun en eur yudal...

Henvel oa he genou ouz eur fourn, du-pod ha tenval sac'h. Tangamma, abaoe he femzek vloaz, a oa en em laket da chikat. Hag ar chikadenn, er vro-mañ, n'eo na roll na karrod met graet eo gant raz mesket gant eur seurt kraon c'houero dastumet en eun delienn banan. Gant ar chikat-se e teu ar staon, an teod, an dent ar genou a-bez da veza ruz-du.

Dont a ris evelato a-benn da welet, e genou Tangamma, eur pikol kildant, n'he doa kildant nemetañ.

N'em oa ket c'hoaz disonjet kentel an tenner-dent eus ar Japon : eun hojadenn a-gleiz, eun hojadenn a-zehou, eur chachadenn ha mat pell-zo.

Krog e oan en durke... met nec'het e chomen dirak kildant ar vaouez koz... Sevel a rae keuz ganen da veza en em lakaet tennerdent...

Ha ma c'hoarvezfe ganen freuza genou Tangamma ? Ha ma vru-zunfen an dant hep gellout e denna ?... Krena a raen o sonjal e kement-all...

Met en eun taol e savas mez ganen... Penaos ? eur misioner o krena dirak kildant eur vaouez-koz ? Ma n'eo ket eur vez.

— Alo ! Tangamma, digor da c'henou, ha digor bras !

Unan, daou, tri... eun hojadenn a-gleiz, eun hojadenn a-zehou, eur chachadenn eur strakadenn hag... eur youc'hadenn... ha setu diwrizennet kildant du ar vaouez koz.

Fouge ha lorc'h a savas neuze ennou, kement ha ma save em c'hamalad Louis, gwechall, pa bile nao o c'hoari c'hilhou.

Ha bremañ n'em eus aon ebet rak gwella tenner dent ar vro. Dant ebet, kildant ebet n'hell herzel ouz va zurkez. Tennet e vezont holl hag hep keuz ebet d'ezo rak va fayaned n'o deus ezomm ebet da gaout dent evit lonka ar riz pe ar gwriziou tapioka a zebront.

Ha Tangamma, en dervez-hirio a zo he hano Maria. A veac'h m'em oa tennet d'ezi he dant, goude m'he doa kranchet eun tam-mig gwad mesket gant jus he chikadenn e rois d'ezi he c'henta kentel katekiz.

Ne gredfen ket assuri d'eoc'h he deus komprenet mat kement am eus displeget d'ezi ; met ar pezh a zo sur eo e kred Tangamma kement tra a gred an Tad misioner. Ha kement-se a zo awalc'h n'eo ket 'ta, rak an Tad misioner a zo e-mesk ar bayaned e hano an Iliz santel...

Ha setu penaos gant va zurkez nevez-flamm e tennan da genta dent ha kildantou ha goude an drouk-spered eus kalon ar bayaned.

Tad MARIE-URBAIN a Lanarvily  
Misioner kapusin.



**Da zeiz gouel  
ar Chandelour,  
kinnigit da Zoue  
ho kalon, war  
elum enni tan ar  
garantez.**

## Hitler ... Piou eo ?



Ganet eo bet Hitler en Aotrich, e *Braunau*, eur geriadennig war harzou an Alamagn.

E dad a oa maltouter, ha kere p'en deveze amzer ; pa varvas, e vab n'en doa c'hoaz net trizek bloaz.

Tri bloaz goude e varvas ivez ar vamm.

Rannet e galon, ar pôtrig emzivad a yeas neuze da *Vienne*... c'hoant d'ezan dont da veza eun den brudet.

Ma vije bet pinvidik awalc'h evit en em lakaat e skol eur mestr ampart, e vije bet deuet da veza eur mestr war al liverez hag ar gizellerez. Kalz spered en doa ha dournet mat e oa ivez.

Met, evit gounid e vara eo ret d'ezan eñ em rei da labouriou grosoc'h... dont da veza liver ha mañsoner. Beva' ra paour en eun tamm toull-kambr... ha derveziou a vez, ne gemer nemet bara ha lèz, evit gellout espern eur gwenneg bennak da bremañ levrion.

Hag epad an amzer-se, e wel dirazañ pennou-bras ha tud pinvidik ar vro oc'h ober dispignou foll evit o flijaduriou.

N'eo ket krenv awalc'h e feiz evit e lakat da blega dindan bolontez Doue hag ober d'ezañ dougen e groaz.

Re zen a benn eo evelato evit en em rei d'an eva pe d'ar plijaduriou all...

Trenka' ra e galon.

Ker Vienne n'hell ket rei tro d'ezañ d'en em sevel dreist ar re all. Mont a ra da glask fred d'al lec'h all, betek *Munich*.

Eno e tremen e amzer vak o studia kredennoù ar socialist *Karl Marx*. Met eur yudeo eo *Karl Marx*, ha ne blij ket d'ezañ ar Juzevien. N'eo ket plijet ganto prena digantan an taolennou en doa livet, hag abaoue en deus kasoni outo.

Ouspenn-se, ne blij ket d'ezañ an dud n'int ket eus e ouenn. Klevet a ra komz diwarbenn ar gredenn-se, hanvet e galleg « *le racisme* » hag a zo eur seurt relijion hag a laka ar ouenn (la race) dreist pep tra. Doue ar relijion-se, koulz lavaret, eo ar ouenn... Kavet en deus Hitler e hent : ouz ar ouenn e ray ivez e Zoue.

Setu ma tarz ar brezel bras. Mont a ra d'ar brezel. Gloazet eo ha taget gant ar gaz. En ospital e oa c'hoaz pa voe sinet ar peoc'h... Kounnari a reas pa glevas hano eus ar freuz a oa en e vro, a oa, emezañ, eur vez eviti beza sinet ar peoc'h-se.

Emañ dispennet e vro ha rannet tamm ha tamm etre ar broiou all. Ne fallgalono ket ar paotr daoust da se, hag en e benn emañ c'hoaz doun ar sonj ober eus « ouenn » an Alamanted, kenta ouenn ar bed. Sevel a ra ar parti « national-socialist ». Evit e zerc'hel en e sav Hitler ne gil na dirak ar gaou na zoken dirak al laza...

Emañ taolet er prizoun. Ne gollo ket e amzer evit-se. Er prizoun eo e skriv e levr « *Mein Kampf* » (*Va emgann*) evit displega e vennoziou d'e genvroiz. Dre vilionou eo bet moulet ha skignet al levr-se.

E pajennoù al levr-se, e labour Hitler da blanta penna-dou en e genvroiz. « *Ret e vezo, emezañ, gounid adarre an douarou kollet, n'eo ket avat gant teodou lemm ar bolitikerier, met gant klezeier lemm ar soudarded...* »

Deski 'ra d'ezo kaout kas ouz ar Frañz. N'en deus nemet dismegañs evit ar poblou estren, dreist-holl evit an dud du, hanvet gantañ, « *hanter-varmouzed* ».

Ouenn an Alamanted eo ar ouenn hep he far, ha ret eo rei d'ezi, er bed, ar plas he deus gwir da gaout. Evit gounid an douarou he deus ezomm, eo ret d'ezi kaout bugale « *skanv evel ar gedon, gwenv evel al ler, kalet evel an dir.* »

N'eus nemet an Alamagn hag a oar en em c'houarn... ar broiou all n'eus en o fenn nemet marc'hadourien plasou kaer, enoriou ha pae vras.

Gant Hitler, a-dra-sur, n'eus ket hano a gement-se. Deski a ra d'e genvroiz eo « *eur brasoc'h enor beza skuber-ruiou en Alamagn eget beza roue en eur vro all bennak.* »

Ret eo evelato, emezañ, kaout relijion... Met ne gemero er relijion nemet ar c'hredennoù hag ar gourc'hemennou a c'hell rei skoazell d'ezañ evit dont a-benn eus e labour. Ha n'eo ket ar relijion eo a viro outan da gemer ar gwir da rei maro pe vuhez d'an neb a blijo gantañ, hep soursi ebet ouz ene an dud.

Setu Hitler, mestr ar bobl a dle dont da veza, eun dervez, hervez e gomzou d'ezañ e-unan, « *mestr ar bed a-bez* ».

N'heller ket tamall d'ezañ beza kuzet e vennad... Ra blijo gant Doue digeri daoulagad ar broiou kristen, rei d'ezo nerz d'en em unani, d'en em grenvaat en o feiz, evit diarbenn diwarno ar freuz hag ar reuz, an tan hag ar gwad...

MABIG.

## Evel ma labourer an douar

Lezennou a zo... gwir evit ar pezh a sell ouz al labour-douar, ken gwir all evit ar pezh a sell ouz al labour a dle ar gerent ober e ene o bugale.



O, mammou  
karit ene  
ho pugale !



Setu al lezenn genta :

Araok eosti eo ret kempenn an douar hag hada.

An holl a oar kement-man. Rak evit her gouzout eo awalc'h kaout pemp gwennegad skiant-prena dindan an tok... Bez'ez eus koulskoude tadou ha mammou hag o deus disonjet al lezenn-se...

Daoust ha n'int ket stank ar re anezo a lez o bugale da sevel evel ma plij d'ezo ?

Daoust ha rouez int ar re a lavar n'eo ket ret kempenn na spered, na kalon nag ene ar vugale ?

Daoust ha n'ho peus ket klevet darn o tiskleria dichek : va bugale a ra ar pezh a garont... ?

Diwezatoc'h, pa vezo deuet mare an eost, kaout a ray ar gerent-se bugale vat, bugale sentus, doujus ha direbech e pep doare ? Aon bras am eus e kouesfe o lipenn war o lapenn hag o meudig en o dourn... rak a-barz eosti eo ret kempenn an douar hag hada.

Setu ar eil lezenn :

Pa ne vez hadet netra, ne ziwan nemet louzeier.

Ma c'hoarvez gant Yann-Gouer ankounac'haat hada e

bark, daoust hag ar park a chomo goullou ? Ne chomo ket, bezit dinec'h. Pa zeuy an nevez, amzer, koulz hag er parkeier all, e savo ennañ ivez glasvez... met siouaz ar glasvez-se ne vezint nemet louzeier ha netra ken. Al louzeier fall n'eus ket ezomm d'o hada... anezo o unan e savont.

Ma ne hadit netra vat ebet e ene ho pugale, ne chomo ket goullou an ene-se. Stank e tiwano ennan ar plegou fall... buan e kreskint, e tougint deliou, bleuniou ha frouez trenk ha c'houero.

Koulz hag er parkeier, e ene ar vugale, e tiwan al louzeier fall, hep na vijent bet hadet.

*Trede lezenn.*

Seul vui ma vezer bet lezirek da gempenn eur park, seul ziaesoc'h e vez hen ober goude.

Va Doue, ya. An holl a oar pegen diaes eo dont a-benn da skarza diouz eur park an alc'houezenn, pe ar roz-ki a vez bet lezet d'en em skigna ennañ... Bloaveziou labour a vo ret ober arak ma vo douar neat er park-se...

Ma lezit plegou fall da sanko gwriziou doun e ene ho pugale, ho pezo mil boan o c'houenat an ene-se...

Aesoc'h eo miret outo da ziwan eget m'eo o diwrizienna. Na zaleit ket pelloc'h da gempenn ene ho pugale.

DRADEM.



*Petro zo gant*

*"LANIG"*

*en e baner ?*

*Eun istor gaer*

*evit*

*ar miz a zeu.*

## PEDENN AL LABOURER-DOUAR



Ha gant ar gliz-noz e kouez war an douar, bennoz ar baradoz.

Salver Jezuz, c'houi hag a garie komz alies, en ho prezegennou, eus labouriou an douar, grit eur sell a vadelez ouz maeziou hor bro.

Gwechall, war ar maeziou-se, ho peus eostet ar c'haera vertuziou kristen... o gwelet a reomp, hirio, siouaz, o vont da veza beuzet gant kredennou ha giziou digristen. Dizale zoken e vezint goullou.

Ne fell ket d'eomp, o Jezuz, gwelet hor maeziou o vervel, met gouzout a reomp n'hellont chom beo, nemet ma teuit, C'houi, da veza mestr warno adarre.

Diazezit start ho rouantelez en hor c'halonou. Deskit d'eomp istimout, dreist pep tra all, ar vuhez kristen bet hadet ennomp, da zeiz hor badiziant, hag a vagit gant ho korf santel.

O Jezuz, labourer e Nazared,

deskit d'eomp :


pegen c'houek ha pegen yac'h eo buhez al labourer douar;

pegen aes evitan kaout Doue hag E veuli e-kreiz ar maeziou sioul;

deskit d'eomp beza kalonek gant al labour, ha dougen laouen hor samm, zoken pa vez pounner, en eur sevel hon daoulagad, gant fizians, warzu an Neñv.

Lakit ivez e kalon hor c'hoarezed, ar goueriatezed, ar mennoziou a zo en hor c'halon-ni; grit d'ezo karet ar pez a garomp, hon iliz parrez, hon ti, hor maeziou, evit ma c'hellimp, unanet gant eun hevelep karantez, sevel familhou a vo kavet enno, stank, kristenien evit ar vro, ha sent evit ar baradoz.

Evelse bezet graet.



# WAR EVEZ

---

*Koant da welet en he broz rouz,  
An ilizig, pell diouz an trouz,  
A gar selaou, e-harz he zroad,  
Ar waz-red a luban d'ar c'hoad.*

*Ar paotr derved, e skeud ar gwez,  
Gant e sutell pe gant e vouez,  
A daol d'an dud, evit netra,  
Kement kanaouenn gaer a ra.*

*Hogen, ar c'hloc'h koz, en tour glaz,  
En em laka da seni glaz,  
Da seni kaon du, ha raktal  
E tremen lugenn war e dal.*

*War e vuzell, e son a dav,  
En e lagad daelou a sav,  
En e galon, ez a d'an esk  
Mammen ar c'han, a-gent ker fresk.*

*Ha nijal a ra e spered  
D'an toull digor bras er vered...  
Bugel, war da serch, kaer e po,  
Glaz, eun devez, sonet a vo.*

*Evelse ta, graez en da stad,  
Bolonte fur Doue an Tad,  
Ped ar Werc'hez, ped hag ez i,  
D'an devez-se, ganti d'he zi.*

J. L'HELGOUAC'H. O. M. I.

---